




KENVREURIEZ AR BREZONEG

KAIEROU KENVREURIEZ AR BREZONEG

Degved Bloavez

Niverenn 50 - Mae 1979

Taolenn
.....

Rak-skrid	p. 1
Dastumad Kanou santel diwar ar Skritur Zakr pe Himnou latin, gand Visant Seit�	p. 3
Salmou ar Binienn, gand Sa�g Santeg.....	p.13
C'hwi a zo katolik.. Petra je�ch an dra-ze en ho puez?.....	p.21
An Adorasion er g�r.....	p. 22
Roll ar pezh a zo bet embannet el Levr Overenn, Levriou Lennadenno hag er 49 kenta Kaier B. ar B.	p 24

Mignoned ha lennerien ker,

An niverenn-ma  (50) eo ar genta
euz ar rummad nevez a bemp niverenn.

Ho pedi a reom eta da renevezi ho
koumanant (25 lur) evid ma vo ar brezo-
neg en e renk hag en e blas ivez el li-
derez a hirio.

Bennoz ha trugarez deoh !

K. ar B.

Evid kement tra a zell ouz "Kenreuriez
ar Brezoneg, her goulenn digand :

An Aotrou Job SEITE, Skol an Aod
29249 GUISSENY

CCP 1738-66 RENNES

Kavoud a reoh azaleg bremañ :

1.-	Levr Overenn.....	35	lur
2.-	Komz Doue en Overenn, levr T	30	lur
3.-	Komz Doue en Overenn, levr A.B.C. pebhini.....	20	lur
4.-	Ar briedelez	8	lur
5.-	An Nouenn	8	lur
6.-	Cantiques du diocèse de Quimper et de Léon....	35	lur
7.-	Kroaziou keltieg (Bleun-brug).....	3	lur
8.-	Overennou evid an Anaon.....	8	lur
9.-	Overennou en enor d'ar Werhez.....	8	lur
10.-	Sakramant ar Vadiziant	8	lur
11.-	Enoc'h Arden	8	lur
12.-	Overennou en enor d'ar zent ha d'ar zentezed.....	10	lur

+ mizou kas.

Mignoned,

Gand an niverenn-mañ, e vo deuet er mêz euz ar wask hanter kant kaier bet embannet gand Kenvreuriez ar Brezoneg. Dek bloaz a zo, pe dost, etre ar haier kenta hag hemañ, peogwir ar henta a zo bet embannet e miz kerzu 1969.

An Aotrou Chalonî NEDELEG, Per Yann evid e vignoned, eo e-noa, a-unan gand an Aotou 'n Eskob FAVE, sonjet er haierou-mañ ha lakeet anezo war ar starn. Braz oa an dachenn, red oa aoza peb tra evid al liderez e brezoneg, evel ma veze grêt goude ar honsil en darn vrasa euz ar yezou a zo war an douar. Diwar an noaz, koulz lavared, oa red sevel peb tra : an overenn da lakad e brezoneg, al lennadennou da drei oll e brezoneg, euz an testamant koz, euz an testamant nevez, ar salmou, an aviel, ar han... ha bian oa ar jeo. Med keit ha ma chomer heb kregi gand al labour ne deuer ket, a dra-zur a benn anezañ, ha setu inti o daou a-zevri gand al labour, sikouret awechou gand hemañ pe hennon.

Ha Per Yann a hellas evelse rei d'ar veleien ha d'an dud fidel ar pemzeg kaier kenta. "Bez ' ez oa gand Per Yann, eur yez eeun, blaz mad ganti bepred, saouruz daoust d'an danvez uhel ha santel". (K 20)

Pa deuas Pêr Yann da vankoud, e mezeven 1971, ar skouadennig labourerien a jomas nehet eur pennadig amzer. Lod a zonje: maro al labous, maro ar han. Med dizale an Ao. SEITE, Job, a oa en e zav, e zorn mord war baviou an alar, hag abaoe, seiz bloaz a zo, ez a dahmad, eeun gand an ero.

N'eo ket peur-aret ar park, dre hraz Doue, pell ahano; ar pezh a zo chomet da lêton a vo troet eun deiz da zond, abred pe ziwevad. Daou levr overenn 'zo bet embannet, pevar levr lennadennou : A B C T, moulllet e skol Gwisseny, pe e presbital Sizun ha Montroulez.

Azaleg ar haier 18 ez eus bet klasket ouspenn rei da anaoud ar pezh a glasket dre ar haierou. N'eus bet, koulz lavared, deuet er mêz abaoe, niverenn ebed heb na vefe bet skoet war an annev : pe seurt brezoneg a zo ganeom (K 19 ha 20), overennou e brezoneg er parrezioù (K 18), Diviz etre Fanch hag e berson (K 38 39,40 hag all). Kaoud a reot amañ warlerh eun dastum euz ar pezh a zo bet embannet evelse.

Eur benveg a zo bremañ etre daouarn ar veleien evid lida an overenn e brezoneg, arabad he lezel da vergla.

Etre daou ar haierou a oa krog e liderez ar zakramanchou; ar beleg en-devez da eureuji, da vadezi, da rei an nouenn, da ober wardro ar re glañv, ar re varo, da zikour ar vugale da heuill mad an overenn. Er haierou et kavot kement a zo red.

N'eo ket hebken troidigeziou evid al liderez eo a gaver hag a gavor er haierou, med kement tra a zell ouz ar brezoneg. Talvouduz eo bet ar pez a lavare an Ao. Pencreac'h diwarbenn al latin, labour an Ao. 'n Eskob Favé (forme pronominale du verbe). Souezuz eo bet gweled pegement a gemm a zo deuet e pevar hant vloaz e diou bedenn ar bobl kristen : an Ave Maria hag ar Pater noster, ha kement-se atao dre zil ha dre gaer, sioulig ha disinkan. Bennoz d'an Ao. Falc'hun da veza deuet da zikour ol labour.

N'eo ketêz deom dibuna amañ kement a zo bet skrivet er haierou, c'hwi a gavo an darn vrasa anezo amañ warlerh. Arabad din koulskoude dizonjal er hantikou, eun hanter kant anezo da vianna. Eur ouenn varzed a zo diwanet, ra blijo gand sant Herve lakaat c'hoaz o niver da greski!

Eur bedenn am-eфе da ober evid echui. Ra vo kendalhet gand al labour, ma hello, abenn deg bloaz amañ, unan bennag dond da lavared adarre da Vreiziz : mad! hanter kant kaier all a zo bet moulllet evid gloar Doue ha servij ar Vretoned.

Bennoz Doue d'ar re oll o-deus or sikouret!

K. a. B.

N.B. - Roll ar pez a zo bet embannet a gavor e fin an niverenn-mañ.

DASTUMAD KANOU SANTEL, diwar ar Skritur Zakr, pe Himnou latin
gand Visant Seité

CRUDELIS HERODES.

Gouel ar Rouane.

*Herodez paour, Roue fallagr,
Perag sponta leun a gounnar,
Dirag Jezuz, an Oan sakr,
Mestr an Neñv hag an Douar.*

*Euz ar Sav-Heol, Tri Roue braz,
A heul gand prés, eur steredenn.
He sklerijenn, war eñn, o has
Da graou Jezuz, da Vetleem.*

*Oanig Doue en-deus sakret
Dour burzuduz d'or badezi.
Hag ar pehed n'en-deus ket greet
En-deus lammet diwarnom-ni.*

*E oll halloud en em ziskouez:
An dour a dro prim e gwin ruz,
Ha tud Kana, gand Levenez,
A veul gand feiz galloud Jezuz.*

*Gloar da Jezuz hag a ziskouez
E oll halloud d'ar bayaned.
Bennoz d'an Tad ha gloar ivez.
D'ar Spered-Glan, enor bepréd.*

AMEN.ù

A hell beza kanet war don:

"Crudelis Herodes"

pe eun ton all: ton eur hantig brezoneg.

War Menez-Kalvar Lourd, da geñver Sizun ar Basion 1964.

AUDI. BEGNINE.

Suliou ar Horaiz.

Krouer santel ha mab meurbéd,
Gwelit poaniou ho tudou keiz.
A greiz kalon, ni holl ho ped,
E pinienn ar Horaiz.

C'hwi hag a lern er halonou,
Gwelit enno glabar hag euz.
Distrei a reom ouzoh, Aotrou,
Pardonit deom, braz eo or heuz.

Ha mar deo braz or pehejou
Ho karantez 'zo brasoh c'hoaz.
C'hwi ho-peus peet on oll dleou,
Dre ho maro war goad ar groaz.

Grit ma vleunio on eneo,
Gwalhet gand yun ar binijenn.
Ha grit ma vo yah or horfou,
Or spered leun a sklerijenn.

O Daue Sakr, teir gwech santel,
Ra vezoh meulet gand ar béd.
Dre zour ho kraz, grit deom genel;
D'ar gwir vuez a bad bepred.

AMEN..

A hell beza kanet war don:
"Audi begnine conditor"
pe war don eur hantig brezoneg.

Lourd, da geñver Koraiz 1964.

Diwar "Levr an Ao.Uguen."p.273

AR YAOU-BASK.

SALUTIS HUMANAË.

*Salver an dud, on levenez,
Krouer ar Béd ho-peus prenet,
Sklerijenn gaer or harantez,
Roue an dud hag an Elez.*

*Ho trugarez a zo ken braz.
Dougen a rit or pehejou,
Hag evito, war ar Groaz,
Ho-peus gouzavet kalz poaniou.*

*Terri a rit nerz an diaculou,
Dijadenna ar sklavourien.
Hirio e renit en Neñvou.
trehit hoh oll enebourien.*

*Ho madelez a zo divent;
Roit ar pare d'or hleñvejou,
Ha grit deom mond da vro ar Zent,
D'ho meuli héd ar hantvejou.*

*O C'hwi, levenez on daelou,
Bezit ol hoant or halonou.
Bezit or pae er Baradoz,
El leh emañ ouz or gortoz.*

AMEN.

Sizun ar Basion.

Lourd 1964.

Diwar levr-overenn an Ao.Uguen.

VICTIMAE PASCHALI.

Da Jezuz, Oan Pask kinniget,
Ra gano ar gristenien.

Oanig maro dibehet
Gantan oll om dasprenet.
Setu ni adarre
E gras Doue.

Ar vuez hag an Ankou,
'Zo bet ganto emgannou:
Méd Jezuz a zo beo,
Treh d'ar maro.

-Lavar din, Madalen,
Petra 'peus gwelet en hent ?

-Ar bez am-eus gwelet goullo,
Ar Hrist 'zo adsavet, treh d'ar maro !

Testou eo an Elez.
Al liñser-gañv 'zo ivez.

Adsavet Jezuz, ô dudi !
E Bro Galile e vo en ho raog-c'hwiti.

Beo ar Hrist ! Ni oll a oar !
Meuleudi ha gloar !

O Roue, TRehour-Meur,
Truez ouzom.

AMEN.
Alleluia.

War an ton latin.

AD REGIAS.

Suliou goude Pask.

Galvet da bréd an Oan Jezuz,
 Ganeom on dillad kaer gwenn-kann,
 Goude tremen dre ar Mor-Ruz,
 Kanom d'ar Hrist meuleudi splann.

Brokuz e ro e garantez,
 E Wad divin deom da eva.
 Rei a ra c'hoaz, d'an oll bemdez,
 E Gorr Santel 'vid or maga.

Gwad ruz an Oan war an doriou
 A zistro dorn an El Santel.
 Ar mor a veuz en e zouriou
 Enebourien pobl Israel.

C'hwi eo or Pask, KRIST on Aotrou,
 C'hwi eo an Oan sakrifiet.
 C'hwi eo bara on eneou,
 Euz barr an Neñv deom kinniget.

O KRIST, C'hwi eo an OSTI sakr
 A ziskar krenn nerz an Ankou,
 A dreh ar bed, an diaoul fallagr,
 A ro buez d'an eneou.

Goude beza trehet ar bed,
 An ivern kriz, e nerziou fall,
 Ar Hrist a zav, barr-leun a skéd,
 A zigor deom peoh ar bed all.

'Vid ma vezoh, atao, Jezuz,
 Levenez Pask or Halonou,
 Diouz ar pehed, e hlaour euzuz,
 Diwallit mad on eneou.

Da Zoue Tad, gloar ha meulgan,
 Iae d'ar Hrist resusitet.
 Ha kemend-all d'ar Spered Glan.
 D'o zri enor, doujañs, bepred.

AMEN.

A hell beza kanet war don:
 "Ad regias"
 pe eun ton kantig brezoneg.

Hervez Levr-Overenn an Ab.Uguen.

Lourd. Sizun Santel.

M A G N I F I C A T

-
- Kanit, va ene, kanit meuleudi, "
Va ene a zo er vrasa dudi.
 - Doue 'n-eus taolet sell e garantez, "
War e blahig paour e zervichérez.
 - Ya, diwar vremañ, gand an oll vroïou, "
Vin anvet eüruz dreist an oll vammou.
 - An Oll-Halloudeg, ennon ken dister, "
A ra eur burzud, ô pebez mister!
 - Hag e drugarez a strink heb paouez, "
Euz eur rumm d'eun all gand kalz largentez.
 - Diskouezet e-neus e halloud dispar, "
Diskaret e-neus lorch an dud digar.
 - Didronet e-neus ar pennou uhel, "
Ha savet uhel ar re a oa izel.
 - D'ar re o-deus naon eñ a ro pourvez, "
D'ar pinvidig fall e ro dienez
 - Israel e-neus digantañ skoazell, "
Hag e vadelez a zo eternal.
 - Hervez promesaou e oll lavarou, "
D'on Tad Abraham koulz ha d'on Tadou.
 - Kanom meuleudi ha gloar eternal "
D'an Tad, d'ar Mab, d'ar Spered Santel.
 - Evel a viskoaz ha da virviken, "
Hirio ha warhoaz hag atao, Amen.

A hell beza kanet war eun ton
gregorian, pe ton braz ar "Magnificat.

V E N I C R E A T O R

.....

Spered Santel, o Spered Glan,
Diskennit nerz ho teodou tan
War eneou ho pugale,
Ma vezo tomm o harante.

c'hwi eo a zo Spered-Krouer,
Da bep kalon, ar Frealzer,
Eienenn veo ha sklerijenn,
Ha d'or buez eun heol laouen.

C'hwi eo spered pep donezon
Ha nerz Doue war bep kalon
C'hwi, promesa Doue an Tad,
A ra d'or homzou dougenn had

D'or sperejou roit levenez,
D'or halonou, ho karantez
Grit d'or c'horfou beza nerzuz
Dre hraz ho tan oll hallouduz.

Pellañt diouzom on enebour
Ma vo ar peoh hag ho sikour
Warnom bepred beteg mervel,
'Vid d'or buez beza santel.

Deskit deom c'hoaz anaoud ervad
Doue ar Mab, Doue an Tad,
Ha kredi start ez oh ive
Spered an eil hag egile.

Enor ha gloar e peb amzer
D'ar Spered glan, ar Frealzer,
D'an Aotrou Krist treh d'ar maro,
D'e Dad dreist-oll, bennoz ato.

V E N I S A N C T E

Diskennit, ô Spered Glan;
Taolit warnom teodou tan
Euz an Neñvou heb ehan.

Deuit, tad ar beorien,
Ha war on teñvalijenn
Strinkit flamm ho sklerijenn.

C'hwi 'zo deom eur Frealzer,
Madelezuz ha tener,
Santel ha leun a zouster.

Diskuilz el labouriou tenn,
Sioul, birvidig ouspenn,
Ha bann-heol war on anken.

O sklerijenn on Doue,
Entanit deom on ene,
Gand gras kaer ho karante.

Hepdoh-C'hwi, n'eus den ebed
A hellfe beza salvet.
Harpit deom or feiz er bed.

Or gwalhit a bep pehed,
Torrit ivez or sehed,
Ha pareit pep kleñved.

Kennerzit ar re a grén,
Tommit ar re 'zo yén,
Ha grit ma vo eün pep dén.

Roit brokuz d'an dud keiz
Hag a lak ennoh o feiz,
Ho tonezonou, o zeiz.

Roit dezo, me ho ped,
Dre eur maro kaer meurbed,
Mond d'an Neñvou leun a sked.

AMEN

V. S.

D a veza kanet war don
ar "Veni Sancte".

ADORO TE DEVOTE

Me 'gred ennoh, Jezuz, kuzet en Osti,
Me 'deu gand karantez, doujuz d'Ho meuli.
Gand ar vrasa doujañs, e stouan izel,
Dirag ho Sakramant, ken braz, ken santel.

Va skianchou... n'hellont ket rei din da zivin
Emaoh aze kuzet, er bara, er gwin.
Med ho komzou deoh-C'hwi n'hellont va zrompla,
C'hwi, Tad ar wirionez, n'hellit fazia.

War groaz Menez-Kalvar, an Doue hepken
A oa eno kuzet da skiant an den.
Amañ den ha Doue, er spesou dister,
A jom da bep skiant, kuzet, ô mister!

Evel ouz sant Thomas, me ne welan ket,
Ho kouliou digor, koulskoude me 'gred.
Me 'gred emao aze, med harpit va feiz,
Va fizians d'ho kweled en ho sked eun deiz.

O Sakramant santel, Korv ha Gwad Jezuz,
Bara beo diskennet euz an Neñv skeduz.
C'hwi a ro ar vuez d'an ene bepréd,
Grit m'ho tañvin bemdez, keid ma vin er béd.

Pelikan va Doue, Jezuz benniget,
Gwalhit din va ene, dre ho kwad skuillet.
Eur veradenn vihan, forz pegen munud,
A zo gouest da walhi pehejou an dud.

Jezuz hag a welan, dindan ar spesou,
Sevenit din buan, va brasa c'hoantou.
Grit ma hellin ive, dre ho madelez,
Ho kweled eun devez e Bro an Elez.

War don an ADORO TE

V. S.

A V E V E R U M

O va Zalver, deoh meuleudi,
C'hwi bet ganet gand Mari.

Gwir basion ho-peus tañvet
Maro spontuz gouzañvet.

Ho kostez a zo bet toullet,
Ha gwad ha dour 'zo bet redet.

Bezit deom-ni nerz frealzuz
Da eur ar maro spontuz

O Jezuz peur-vad!
O Jezuz ken mad !

O Jezuz Mab dous ar Werhez,
Ho pezit ouzom kalz truez. Amen.

V. S.

A hell beza kanet war
don an "AVE VERUM

L A U D A S I O N

1

Meul, ô Sion, e pep amzer,
Meul da Bastor ha da Zalver,
Dre himnou ha Kantikou.

2

Kana 'hellez 'vel m'eo dleet,
Ne vo biken re vad meulet,
War an douar, en Neñvou.

3

Meulom hirio, oll asamblez
Bara Doue a ro buez
Rannet evid or maga.

4

Bara roet d'an Ebestel,
Gand or Zalver a-raog mervel,
Epad ar goan ziweza.

5

Kanom uhel, gand levenez,
En eur dridal gand an Elez,
Meuleudi e pep amzer.

6

O gouel braz a ra d'or spered
Soñjal en deiz m'eo bet savet
Sakramant sakr an Aoter.

7

Hirio Pask al lezenn nevez,
Ouz taol Jezuz, Roue nevez,
A skub Pask al lezenn goz.

8

Hirio e sav an Heol-Nevez
A strink warnom ar wirionez :
Goulou deiz eleh an noz.

9

Pez a reas Jezuz, neuze,
A hourhemenn deom-ni ive,
Da zerhel koun anezan.

10

Bet kelennet gand or Zalver,
Konsakrom ar spesou dister,
Hag a zalvo peb unan.

11

War gomz Jezuz, kredom brema,
Ema e gorr 'leh ar bara
Hag e wad e-leh ar gwin.

12

Kement-se zo dreist or spered :
N'hellom kompren, n'hellom gweled
Nemed gand or feiz hepkén.

13

Dindan spesou, dindan skeudou,
Ema kuzet korv On Aotrou :
Pebez mister 'vid an dén!

14

E gorr ganeom a vez debret,
E wad ganeom a vez evet :
Oll ema dindan pep spés.

15

Ne vez morse rannet, torret,
Da bep hini pa vez roet
E chom atao en e bész.

16

Kant ha mil dén 'hell e zebri
A-bész ema gand pep hini
Hag hep mond morse da hěsk.

17

D'ar re vad eo magadurez,
D'ar re fall en em ro ivez :
War eun dro, buez, maro.

18

Maro d'ar peher kaledet,
Buez d'ar peher pardonet :
Nag a gemm! Meulom atao.

19

Pa vez rannet deoh an Osti,
Na dit ket d'en em enkrezi :
E pep tamm Jezuz a vev.

20

Jezuz ne hell beza rannet.
Ar spés hebken a vez torret :
En e bész e chom bepréd.

21

Bara 'n Elez, bevañs divin,
Hirio buez ar perhirin,
Ra vo doujet da viken.

22

Gand Izaak eo bet taolennet,
Gand ar "man" eo bet skeudennet,
Oan Pask ar gristenien.

23

Pastor santel, leun a druez,
Oll on renit d'ar gwir vuez,
Er bed all ouz or gortoz.

24

Dre ho kalloud, ho madelez,
Grit ma vezin gand an Elez,
Ouz ho taol, er Baradoz.

V. S. hag Y. L.

(A hell beza kanet war an ton latin)

JESU DULCIS

O Jezuz, ano dous meurbed,
 Ano dousoh n'eus ket er bed.
 Evel ar mel, me a hoanta,
 Beza atao ouz ho tañva.

Netra evidon n'eo gwelloh,
 Netra evidon n'eo c'hwekoh.
 Netra n'am laka ken eüruz,
 Ha blaz hoh ano, va Jezuz.

Jezuz, fizians ar beherien,
 Jezuz, teñzor ar beorien,
 Jezuz, dudi ar re ho kar,
 Jezuz, eürusted heb he far.

Teod an dén paour n'hell displega,
 Na dén e-béd ne hell skriva,
 Pegen mad eo ano Jezuz !
 C'hwil 'zo douster ken souezuz.

Bezit, Jezuz, on levenez.
 Bezit, Jezuz, or harantez.
 Med dreist pep tra bezit bepréd,
 Enor tri 'Ferson an Dreinded.

AMEN.

V. S.

War an ton latin.

P A N G E L I N G U A

1
 Kan va ene, mister dispar,
 Korv ha gwad Doue Salver,
 Profet 'vidom war ar Halvar.
 Mab unik eur vamm dener,
 Roue an neñv hag an douar,
 Meulom-Eñ gand kalz preder.

2
 Roet d'an dén 'vid e zalvi,
 Gand Doue hag ar Werhez,
 E-neus d'ar béd, hep damanti,
 Prezeget ar wirionez,
 Ha lezet deom, kent kimiadi,
 Sakramant e garantez.

3
 A-raog mervel, tra burzuduz,
 E-pad koan, d'e ebestel,
 E ro a-béz, e Gorv eüruz,
 D'o maga : boued eternal.
 Pebez mister, ô va Jezuz !
 Rei da eva ho kwad santel.

4
 Doue ar Mab en em hreet dén,
 A ro deom 'vid or maga,
 Tra souezuz, tra digompren !
 E gorv sakr e-giz bara,
 E wad divin 'vel dour eien,
 An oll dud a hell eva.

5
 Kanom laouen, gloar, meuleudi,
 Da Zoue an Tad, ar Mab,
 D'ar Spered Glan, bennoz, dudi,
 Da viken trugarez vad.
 Kouezom izel da adori,
 Tri Ferson an Dreinded Sakr.

War don "Pange lingua"

V. S.

Doue kounnaret oll, 'kreiz ho puhanegez,
 Na dit ket d'am gourdrouz ha d'am skei digernez.
 Ho pirou lemm em horf a zo sanket gwall zon;
 Dindan ho torn pounner eo brevet va halon.
 Em hroheñ hag em hig, n'eus ket eun tachad yah,
 nag em eskern eur mell divahagn awalh.
 Va fehed a zo bet penn abeg d'ho kounnar,
 Va fehed eo en-eus ho touget d'an diskar
 Rag bernia pehejou dreist va fenn am-eus grêt
 Ha siouaz d'in bremañ, ganto me 'zo gwasket.
 Heñvel ouz eun darzot, heñvel ouz eun den dall,
 Em-eus kaset an droug, renet eur vuhez fall,
 Ha bremañ setu me griet euz ar gwas
 A houliou fleriuz, dalc'hmad, o tiskarga.
 Kroumet oun, em daou-bleg, 'hed an deiz, en enkreiz
 Hag eun tan leskidig o tevi va hroazlez.
 Em horf paour, penn da benn, eun tachad yah n'eus ket.

Va nerz a zo êt kuit, va horf a zo torret,
 Talmi 'ra va halon, ha yudal a rankan.
 Doue, anacoud a rit kement tra a hoantan;
 Pegement e ouelan, Doue, er goud a rit.
 Stank e sko va halon, rag va nerz 'zo êt kuit.
 Ouzin va daoulagad a nah ar sklerijenn,
 n'eus mui den war va zro: va mignoned zoken,
 Va oll amezeien ha va herent tosta,
 Ar pella diouzin eo ganto ar gwella.
 An dud hag a garfe va gweled maro-mig,
 Hag ar re a hoanta va lakaad reuzeudig,
 A stign din rouejou, ha war o muzellou,
 Ne glever 'hed an deiz, nemed ar malloziou.
 Epad an amzer-se, me a ra ar bouzar;
 Ober a ran ar mud, chom a ran dilavar;
 Heñvel poch ouz eun den stanket e skouarniou
 Heñvel poch ouz eun den, n'eus ger gant e hinou

Med ennoh eo, Doue, e lakan va fiziañs,
 Ha ganeoh e vezin skoazellet emichañs,
 Peogwir, dre va fehed, karget oll a enkreiz,
 Eh amzavan ouzoh bremañ va fallentez.
 Ya !Lavared a ran; ra jomint heb hoarzin.
 Ar bern tud fallakr-se hag en em zav ouzin,
 Disterra ma welont va zroad or orjella;
 Rag bez 'emaon war var marteze da goueza,
 Ha va foan garo ne baouez d'an brouda.
 Enebourien em-eus, disleal, diniver,
 A gasa ahanon heb abeg d'en ober,
 A ro din pa hellont an droug evid ar vad
 Hag a glask trouz ouzin war zigarez m'oun mad.
 Aotrou, C'hwi da vihana, n'am dilezit biken,
 Ezomm am-eus e vijeñ dibaouez em hichenn.
 Diredit 'ta buhan da rei din ho skoazell,
 O Salver benniget, Aotrou Doue Santel.

Na jomit ket, Aotrou, bouzar ouz va fedenn:
 Fidel oh ha leal, roit din va goulenn?
 Na stagit ket d'am barn, rag n'eus war an douar
 Den ebed hag a ve dirazoh heb kaïllar.
 Bepred ouz va gwaska, eun enebour touet
 A vres dindan e dreid va izili flastret,
 Hag a zalh ahanon 'kreiz an deñvalijenn.
 Evel an dud varo n'o deus tamm sklerijenn.
 Mond a ra kuit va nerz; semplaad a ran bemdeiz,
 Ha va halon a sko goustadig ha rouez.
 Dond a ra din da soñj euz an amzer gwechall,
 Euz ho madoberou n'hellan ket disoñjal,
 Ha kement ho peus grêt ne da ket euz va fenn,
 Hastit afo, Doue, seveni va fedenn.
 Va daouarn a zalhan warzu ennoh savet
 Hag an douar en hañv gand an heol dizehet
 n'en deus ker braz mall da gaoud eur strinkad dour
 Eged m'am eus da gaoud diganeoh ho sikour.

Doue, dinerzet oun, fallaad a ran ervad;
 Na dit ket diwarnon da drei ho taoulagad.
 Rag anez oun echu, mond a ran da veza
 Heñvel poch ouz an dud er beziou, o vreina;
 Lavarit din buhan eur gomz a drugarez,
 Ennoh e-meus fiziañs; hag en ho madelez
 Diskouezit din an hent a dlean mond gantan,
 Warzu ennoh, Aotrou, va halon, a zavan.
 Delivrit ahanon diouz va enebourien:
 N'emeus klasket difennour nemedoh hebken.
 Deskit din an doare d'ober deoh plijadur,
 Rag c'hwi eo va Doue ha me ho krouadur.

Aotrou madelezuz, ra zeurio ho spered
 D'am bleina dre eun hent eün ha pæan bepred
 Evid gloar hoh ano rentit din ar vuhez
 Hag en ho lealded va zennit a enkrez.
 Distrujit, me ho ped, va oll enebourien,
 Lakit oll d'ar maro va gwall enebourien,
 Ha diskouezit bremañ madelez em heñver
 Rag me 'zo, va Doue, ho feal servicher.

oooooooooooooooo

Doue madelezuz, bezit ouzin truez,
 Braz eo bet va fehed, brasoh ho trugarez.
 Diouz va fallagriez, penn da benn va gwalhit,
 Diouz sklabez ar pehed, Doue, va dizammit.
 Pegement oun kabluz, her goud a ran ervad,
 Rag bepred va fehed a zev va daoulagad.

Ho lezenn, ganin-me, a zo bet gwall dorret,
 Eneb deoh c'hwi hebken eo e-meus me pehet.
 Ar pezh a gavit fall, am eus kredet ober,
 Hag hen amzao a ran evid ma vezo sklêr
 Da zaoulagad an oll, eo leal ho komzou,
 Gwirion ha didamall ho pardedigeziou.
 War ar fallagriez ez-oun me diwanet,
 Hag e kreiz ar pehed gand va mamm oun ganet.

C'hwi a gar, en ene, gweloud ar wirionez:
 E goueled va halon, lakit don ar furnez.
 Gand dour diwar hysop slarzit kuit va fehed,
 Ha gwennoh eged erh e vezin da weled.
 Lakit din va halon da dridal gand dudi,
 A laouenedigez, roit he gwalh d'ez;
 Ha va eskern brevet ganeoh en ho kounnar
 Ra danvint adarre eul levenez dispar.
 Troit ho taoulagad diwar va fehejou,
 Lammit kuit diwarnon va fallgrieziou.

Doue, Eur galon hlan lakit d'in 'ta em hreiz
 Ha nevezit ennon eur spered stard ha reiz.
 Euz gwel ho taoulagad n'am distaolit ket pell,
 Na lamit diganen skor ho spered Santel.
 Deuit d'am zavetei, ma vin laouen bepred,
 Dre eur spered nerzuz harpit va dinerzded;
 Neuze d'an dud disakr hoh hentchou me'zesko,
 Ha prim ar beherien ouzoh a zistroio.

Pardon, o va Zalver, evid ar gwad skuillet:
 Ra hello va zeot embann ho lealded.
 Aotrou, me hoh asped, deuit da zigeri
 Va muzellou din-me ma hellint ho meuli.
 N'eo ket eur zakrifis digand eur hrouadur
 A hellfe, va Doue, ober deoh plijadur,
 Hag e lazfen tirvi en enor d'hoh ano,
 Ne vijeh ket moarvad laouennêt ganto.
 Va zakrifis din-me 'zo eur spered brevet,
 Ar galon glaharet, c'hwi n'he disprijit ket.

Kit a du gand Sion, hervez ho madelez,
 Moger Jeruzalem, savit-hi a nevez.
 Ha neuze e hellim kinnig sakrifisou.
 Digemeret a reoh diganeom or provou,
 Ha lorch a vo ennoh o weled an tirvi,
 War hoñ aoter bemdez a vil-vern o tevi.

))))))))))))))

Salaouit va fedenn; Doue, ha d'am mouez
 Na jomit ket bouzar. Diwarnon em enkrez
 Na droit ket ho penn; ho skouarn digorit;
 Hirio p'hoh aspedan, buhan va zevenit.
 Niver va derveziou o teuzi me a wel,
 E doare ar voged a nij gand an avel.
 Va eskern a zo krog enno eun tan spontuz,
 Ker gwas ha pa vijent o leski war glaou ruz.
 Skoet eo va halon, disehet eo a grenn
 Evel er prajeier ho peus gwelet ar foenn
 Ankounahaad a ran debri va zamm bara,
 Ha kement e klemman ma ne jom mui netra.
 Da helei va eskern, nemed krohenn diseh.

Evel ar pelikan e klaskan ar goueleh
 Hag evel ar gaouenn, labous an dismantrou,
 Heb gweled den, e karan tremen va deveziou.
 Ne gouskan tamm ha'om a ran va unan penn
 Hemvel ouz an evnig puchet war eun doenn.
 Dalhnad e kouez warnon dismegans, rebechou;
 Enebourien touet am harg a valloziou.
 Ludu e leh bara a za ganen da bred,
 Ha kement a evan 'zo raktal kemmesket
 Gand eur mor a zaelou: rag c'hwi en ho kounnar
 Ho peus va dibradet ha strinket d'an douar.
 Va deveziou a deh ken buan hag ar skeud.
 Evel ar yeot en hañv, disehet oun ha treut.

Med c'hwi, Doue, a jom ar mestr da virviken;
 A rumm da rumm ez 'oh karneulet gand mab den.
 C'hwi a zavo: diskouez a reoh ho trugarez
 Evid Sion, rag deut eo e gwirionez
 Ar mare d'hen ober: hoh oll zervicherien
 A gar euz o hêr-benn ar vein hag ar bouldrenn.
 Ar broadou a-bez da Zoue a zoujo,
 Oll rouaned ar bed dirazan a zoublo;
 P'en dezo adsavet Kêr-Veur Jeruzalem,
 P'en do dizoloet splannder skeduz e zremm,
 Ha p'en do selaouet mouez ar sklavourien,
 O houlen digantan diframma o jadenn.
 Kement-se 'vo skrivet: hag ar gwiskajou tud
 A zo c'hoaz da henel, oll a sk gno ar brud
 Eu zmadelez Doue, ma plij eun deiz gantan
 Diwar ar hreac'h santel m'eo azezet warnan,
 Trei e benn da daoler war an douar eur zell,
 Selaou ar sklavour kez o houlen e skoazetl,
 Terri o ereou-evid m'o do frankiz.
 D'an dud n'hellont gedal nemed eur maro kriz.
 Sion neuze 'glevo kana gloar d'e ano
 Ha gand e veuleudi ar gêr a dregerno,
 Rag dond a rai enni ar rouanteleziou
 Evid meuli Doue, da gemmesk o moueziou

P'edon e kreiz an hent, va nerz ho peus torret;
 Niver va derveziou a zo ganeoh krennet,
 Ha lavared a ran: "Va Doue, da vihana,
 N'am zammit ket diohtu; e maon c'hoaz em gwella."

C'hwi 'bad hag a bado euz eur hantved d'eun all;
 An douar-mañ ho peus diazezet gwechall,
 Hag ho torn e-neus grêt bolz skeduz an neñvou
 Med an neñv, an douar 'zo berr o derveziou !
 C'hwi, ne dremenit ket. An oll draou all avad
 A za prim a dammou evel ar hoz dillad;
 Ken êz ha ma chencom gwiskamant war on tro,
 E hellit, pa garit, chench o doare dezo.
 Med c'hwi, goude kosaad, ne zeu tamm kemm ennoh
 Dreist an oll gantvejou da viken e padoh.
 gouenn ho servicherien da jomg a zistroio
 'Barz ar rouantelez ho peus miret d'ezo.
 Hag emmi starteet gand ho preh gallouduz,
 Dirag ho taoulagad, oll e vevint eüruz.

)))

oooooooooooooooo

SALM 6 DOMINE NE IN FURORE..... MISERERE MEI.

Doue, en ho kounnar, en ho puhaneged,
 Oh ! n'am gourdrouzit ket; bezit ouzin truez.
 Na zeuit ket da skei eur hlañvour glaharet,
 Dinerz e izili ha doaniet e spered.
 Roit din ar pare; lamit kuit diwarnon,
 Ar hleñved danjeruz a zo kroget ennon !
 Daoust ha peur, va Doue, e klevoh va fedenn ?
 Peur erfin e teuoh da rei din va goulenn ?

C'hwi 'zo madelezuz; mirit na zin da goll;
 Rag e bro ar maro, c'hwi 'zo disonjet oll.
 Piou a veul hoh ano e kreiz an iverniou ?
 Va nerz en em zil kuit da heul va huanadou.
 Beb noz gand va dañzu e hlepan va gwele,
 war netñv e vez beb noz. Va daoulagad neuze,
 gwenwet gand ar hlahar o deus kollet o sked.
 Va oll enebourien o deus o hozaet.

Tehit, o tud fallagr, pell diwar va zro-me:
 Va mouez glaharet oll he deus klevet Doue.
 Doue e-neus klevet ahanon o pedi;
 Doue a zo bremañ o tand d'am zeveni.
 Va oll enebourien a vo diarbennet
 Lamm o do, en eun taol e vezint diskaret.

oooooooooooooooooooo

SALM 32 Beati quorum RE

SALM 32 BEATI QUORUM REMISSAE SUNT INIQUITATES....

Euruz an neb a zo lamet kuit e behed
 Pe warnan gand Doue eur holoenn taolet,
 An den gwern e galon da zaoulagad Doue,
 An den didroidell hag eün -tenn e ene.
 'Pad m'eo bet va fehed dalhet ganen e kuz,
 Va eskern a vreine, yudal a raen sportuz,
 Rag ho torn am gwaske hag en noz hag en deiz
 Ha seh-korn ez aio va bonne gwad en hreiz.

Amzao 'ris va fehed; ar golo a lamis
 Diwar va fallentez, ha lavared a ris:
 Me a fell din diskuill va fehed da Zoue,
 Ha c'hwi 'walho ragtal loustoni va ene.
 Ra zeuio peb den mad da ober kement all,
 Da ziskuill e behed hag e oll daoliou fall,
 Araog m'en do Doue troet e gein dezant.
 Ha neuze pa stago an oll steriou ledan
 Da vond diwar o hent ha da helei peb tra,
 Ne hoarvezo gantañ an droug an disterra.
 Ennoh, o va Doue, e vezan o kuzed
 Hag euz a greiz ar wask ganeoh me vez tennet.
 C'hwi eo an hini 'ra d'am halon baour tridal,
 Rag c'hwi a zo bepred war zao ouz va diwall.

Mond a ran d'az kelenn, da ziskouez dit da hent
 Heuill anezan hab aoun ha na vez ket dizent.
 Ne fell ket din tenna diwarnot eul lagad
 Ha rei dit a garfen kuzul aliou mad.
 Klev ganin kement-mañ: henvel poch na vez ket
 Ouz ar mark, ouz ar mul, n'o deus ket a spered,
 Ha n'hellez da vleina, da lakaad da dostaad
 Nemed war o harvan ez pe eur westign vad.
 Niveruz ar poaniou a gouez war an den fall,
 Med an den hag e-neus eur fizians stard diwrall
 E Doue, a beb tu a gavo karantez.
 Tud leal, e Doue lakit ho levenez
 Tridit, kalonou eün, gand laouenedigez.

oooooooooooooooooooooooooooo

Euz goueled an islonk, va Doue, e youhan.
 Klevit 'ta va mouez; hoh aspedi a ran,
 Digorit ho skouarn, bezit mad war evez !
 Ma talhfeh an envor euz or fallagriez,
 Piou a hellfe padoud dirazoh c'hwil, Aotrou ?
 Med c'hwil ankounaha an oll dismegansou
 Evid ma vim douget da zouj ho lezennou.

Fizians 'm 'eus e Doue hag eur fizians diwrall,
 Rag d'e bromesaou dalhmad e chom faal.
 Muioh a vall am-eus da weled va Doue,
 Eged c'hoaz ar gedour da weled ar beure.
 Israel, e Doue fizians, heb acun ebed !
 En, an oll vadelez, d'az pardono bepred.
 Peb galloud 'zo gantan da derri al liemmen,
 A zeu dre ar pehed da huala mab eun den.
 D'ar bobl a Israel e torro e hualou
 En dizamma 'raio euz e oll behejou.

oooooooooooooooo

C'HWI A ZO KATOLIK.... Petra jeñch an dra-ze en ho puez?

An T.V. he-deus meur a wech embannet abadennoù "Les femmes aussi". En unan anezo e weled, evel kustum, paotr an T. V. o tond en eun ti. En eur gegin emañ, eur gegin frank hag a zervij ivez da zal-dibri; a-rez d'an douar emañ, troet warzu ar huz-heol, hag en abeg da-ze nebeud a sklerijenn enni.

An diviz boaz : dimezet oh? ped a vugale? Peseurt micher a ra ho kwaz? petra 'c'hounit? Daoust hag anken ho-peus war dra pe dra? Ha kement 'zo...

Hirio, evid ar wech kenta, en eur echui an abadenn, e ra eur goulenn dihortoz : "Daoust ha c'hwi a zo katolik ?

- Ya, emezi, dre hras Doue, hag aketuz da vond d'an overenn beb sul ha da zevel va bugale e doujañs Doue. Va fried ha me en em glev mad war ar poent-se"

Amañ avañ eur goulenn ken dihortoz all :

- "Ha petra jeñch en ho puez ho feiz katolik?"

Ar vaouez a jom dilavar eun herradig, med labourad a ra he spered. Meur a hini, moarvad, a vefe nehet awalh ma vefe greet outo an hevelebr goulenn.

- "O, emezi, an dra-ze n'eo ket êz da zisplega... Penaoz lavared deoh?... Gweled a rit emañ en eur gegin deñval; ouz ar voger hag ouz ar skloturioù ez eus speget listri kouevr ha taolennou; netra na linter nag a sked dre ziouer a sklerijenn; med pa zeu ar pardaez, bannou an heol war e ziskar a sko a-blomm war ar gegin ha neuze... N'eus netra cheñchet er gegin ha peb tra a gemer eun doare nevez : an taolennou a c'hoari enno al livioù, al listri a sked hag a luh...

"Mad, evidon-me ha va feiz kristen eo ar memez tra : an heol, em buez, eo va feiz, eno e kavan sklerijenn ha nerz; en abeg d'am feiz e kemer va buez eun doare nevez...

"Da weled, va buez a zo heñvel ouz buez peb maouez all. Va amezogez tosta n'eo ket kristenez. Istim am-eus eviti avañ, honest eo e peb keñver he prest atao da renta sikour. Da weled euz an diañvez, or buezioù a zo heñvel mik. An eil hag eben aha-nom : diouz ar mintin farda lein, kas ar vugale d'ar skol, ober ar marhad, ha goudeze kempenn an ti, ober ar huez, renka an dillajoù, etç... Nemed an abeg on doug n'eo ket ar memz hini. Me a zonj e buez ar Werhez Vari e Nazared wardro he ziegez, e buez Jezuz war e vicher a galvez : n'oa ket disheñvel diouz hini o amezeien ha koulskoude pebez kemm e diabarz o halonou !

"Va lezenn eo hini an Aviel : Kared Doue, ha kared an nesa ablamour da Zoue. Da varn an dud hag an digouezadoù, adarre an Aviel displeget gand an Iliz. Anzav a rankan n'eo ket êz din chom da gonta kaoz gand va amezogez nemd diarbenn traoù dister. Mond donnoh eun tammig ha n'emaom mui akord kazimant war netra!"

N'oa ket roet dezi amzer da zispaka hirroh he zonj, med moarvad he-defe gellet lavared : "Lakom al lezennou nevez a zigor frank an nor d'an divors : evidon-me n'hell ket ar briedelez,

santellet dre eur zakramant, beza torret.

Al lezennhag a ro droad da rei taol ar maro d'ar vugale araog ma vent deuet war an douar? Doue a lavar : na lazi ket.

An doare da zavel ar vugale? Re va amezogez a zo savet digredenn; me a fell din diorren va re kristen, deski dezo o hre-ansou hag o fedennou, deski dezo beza kristen hervez ar gourhemennou hag an Aviel.

An diavêziad e-neus kuiteet e vro evid dond amañ warlerh e labour hag e voued a zo breur din, klask a ran e zikour a-blamour d'am feiz.

Pa vezan nehet o klask va hent evel eur martolod war ar mor, an Aviel a zo evidon evel eun tour-tan o tiskouez din hent ar porz.

N'eo ket êz atao mond gand hent an Aviel, med em feiz e kavan nerz, er bedenn, er zakramanchou...

Va feiz kristen n'eo ket eun dra e-kichenn va buez pemdezieg, heb levezon ebed warni.

Ne jeñch netra em buez

med rei a ra da beb tra eun doare nevez.

N'on ket evid lavared muioh deoh."

Paotr an T. V. ne astennas kont ebed.

~~~~~

AN ADORASION-NOZ ER GER

-----

"E kreiz an noz e savim  
d'ho meuli, Aotrou Doue".

Echu eo ar pardon, eun nebeud paotred ha merhed yaouank a zo chomet da gonta kaoz ha da strani en eun ostaleri, teir leo bennag diouz Kastell Paol. Marvaillou ha banneou a c'hoari laz.

An taoliou unneg eur a zon en tour hag unan euz ar baotred yaouank a lavar d'e gamaladed :

"Va digarezit, poent eo din kuitaad rag me am-eus prometet ober eun adoration-noz er gêr euz hanter-noz da eun eur, euz an 2 d'an 3 euz beb miz; en noz-mañ e tigouez va eur."

Hag eñ en hent, o lezel ar re all eun tammig souezet.

Ar paotr yaouank-se a oa unan euz ar re zesketa war ar mêz e penn an Y.K.A.M. (J.A.C.) er barrez, ha prest atao da rei skoazell, e peb doare, d'e amezeien pe da zikour an emgleoiou-micher da vond endro.

An Tad MATEO, pikpusian euz Bro-Colombia, en Amerika-ar-Su a oa deuet diou wech da Gastell evid rei da anaout breuriez an Adoration-noz er gêr. Goulenn a ree digand an dud a volonteiz vad prometi beza war zao o pedi en o fart o-unan er gêr, eun eur ar miz, d'an eur a blijfe dezo, etre 10 eur diouz an noz ha 5 eur diouz ar mintin. Chom a reent da bedi o soñjal en an-

goni ha pasion or Zalver hag o houlenñ pardon euz ar boan greet da Galon Zakr Jezuz gand pehejou an dud. An ano a vez lakeet e ti ar Seurezed Pikpus, war hent Rosko. Ne veze daou ebed d'ar memez eur araog ma vefe karget oll nozveziou ar bloaz. Hag an dra-ze a oe digouezet en amzer an Aotrou Person koz. Pa zeue dezañ dihuna e-kreiz an noz e kemere eur haier a oa war e daol-noz hag e lenne : etre ar 15 hag ar 16 euz ar miz emao, 2 eur diouz ar mintin, en ti-mañ 'n ti emaer o pedi en ano ar barrez.

An Tad Mateo a oa eun devez o prezeg eur retrad d'an Tadou misioner e Bro-China; en em gavoud a reas gand an Tad Yann Vari MAZE euz Henvic, deuet diwezatoh da eskob.

- Euz peleh oh ?
- Euz Henvic e kostez Montroulez ha Kastell-Paol.
- Kastell-Paol ? Er barrez-se morvad em-eus kavet an eneou kaerra war va hent'.

E Kastell e teuas eur vamm a famill d'e gavoud da lakaad heh ano e breuriez an Adorasion-noz.

- Da bed eur e vezoh lakeet?
- Lakit va ano euz a 2 eur da 3 eur.
- Med, Itron, an eur-se a zo unan euz ar re ziesa!
- O, va Zad, petra eo an dra-ze, me am eus kalz a vugale hag aliez e vez unan pe unan oh ober ar hlañv hag e choman da veilla gantañ epad an noz! Moarvad on gouest da ober kement all evid ar Galon Zakr."

Tiegeziou a oa hag o-doa kemeret war o hont eun nozvez penn-da-benn, ha peb hini a zave d'e dro da bedi.

~  
~ ~

Setu eun devosion hag a oa mad gwechall , a vo lavaret, med breman, en on amzer!!

Kredi a ra din eo greet muioh c'hoaz evid on amzer. Gand ar vuez a labour a ren an dud n'o-deus ket mui a amzer da bedi war an deiz e peoh. Med setu ma savont euz o gwele, e-kreiz an noz, o-unan-penn emaint, dirazo o-unan ha dirag Doue... N'eus beleg ebéd evid o zikour da bedi, evel ma vefe en eun ofiz en Iliz. Lenn a reont eur pennad aviel, marteze pennad aviel ar zul tremenet pe ar zul da zond hag e chomont da gompren e komzou Doue, da gompren en o buez o-unan : petra 'ya mad ha petra ne da ket... Doue neuze a gomz outo er sioulder hag a ziskouez dezo an hent da gemer.

Piou a lavaro n'eo ket talvouduz ha frouezuz seurt devo-sion? D'al lennerien ober eun esa hag e welint.

"Setu ar galon he-deus karet kement an dud beteg gouzañv ar basion hag ar maro evid silvidigez ar bed".

ROLL AR PEZ A ZO BET EMBANNET :

- el levr overenn
- el levriou lennadennou
- hag en 50 kaier kenta Kenvreuriez ar Brezoneg

1°) AR ZULIOU WAR AR BLOAZ

|     |        | Levr<br>overenn | Lennadennou |       |       |
|-----|--------|-----------------|-------------|-------|-------|
|     |        |                 | A           | B     | C     |
| 2°  | sul    | p. 91           | p. 59       | p. 48 | p. 46 |
| 3   | "      | 92              | 60          | 50    | 47    |
| 4   | "      | 93              | 62          | 52    | 50    |
| 5   | "      | 93              | 64          | 54    | 52    |
| 6   | "      | 94              | 66          | 55    | 54    |
| 7   | "      | 94              | 68          | 57    | 56    |
| 8   | "      | 95              | 70          | 59    | 58    |
| 9   | "      | 95              | 72          | 61    | 59    |
| 10  | 3      | 96              | 74          | 63    | 62    |
| 11  | "      | 96              | 75          | 65    | 64    |
| 12  | "      | 97              | 77          | 67    | 67    |
| 13  | "      | 97              | 79          | 68    | 68    |
| 14  | "      | 98              | 80          | 71    | 70    |
| 15  | "      | 98              | 82          | 72    | 72    |
| 16  | "      | 99              | 84          | 74    | 74    |
| 17" | "      | 99              | 86          | 76    | 75    |
| 18  | "      | 100             | 88          | 78    | 77    |
| 19  | "      | 100             | 90          | 80    | 79    |
| 20  | "      | 101             | 92          | 82    | 82    |
| 21  | "      | 101             | 93          | 83    | 83    |
| 22  | "      | 102             | 95          | 86    | 85    |
| 23  | "      | 102             | 97          | 88    | 86    |
| 24  | "      | 103             | 98          | 89    | 88    |
| 25  | "      | 104             | 101         | 91    | 91    |
| 26  | "      | 104             | 103         | 93    | 93    |
| 27  | "      | 105             | 104         | 95    | 95    |
| 28  | "      | 105             | 107         | 97    | 96    |
| 29  | "      | 106             | 109         | 99    | 98    |
| 30  | "      | 106             | 110         | 100   | 100   |
| 31  | "      | 107             | 112         | 102   | 102   |
| 32  | "      | 107             | 119         | 104   | 103   |
| 33  | "      | 108             | 117         | 106   | 105   |
| 34  | (K.R.) | 109             | 114         | 107   | 107   |

Kement a zo bet embannet er Haierou, evid ar pezh a zell ouz an overennou da zul ha d'ar gouelioù deiziet hag a hell beza lidet da zul, a vo kavet el Levr Overenn pe e Levriou al lennadennou A.B.C.T.

Suliou ha goueliou (1)

|                        | Levr<br>Overenn | Levr al Lennadennou |     |     |      |
|------------------------|-----------------|---------------------|-----|-----|------|
|                        |                 | A                   | B   | C   | T    |
| 1a sul an Azvent       | p. 5            | p.5                 | p.1 | p.2 |      |
| 2a " "                 | 6               | 7                   | 3   | 3   |      |
| 3 " "                  | 6               | 9                   | 4   | 5   |      |
| 4 " "                  | 7               | 11                  | 6   | 7   |      |
| Gouel Nedeleg          |                 |                     |     |     |      |
| en derhent             | 9               |                     |     |     | p. 1 |
| en noz                 | 10              |                     |     |     | 4    |
| da houlou deiz         | 11              |                     |     |     | 7    |
| en deiz                | 12              |                     |     |     | 8    |
| Gouel ar Famill zantel | 12              |                     |     |     | 11   |
| Santez Mari Mamm Doue  | 13              |                     |     |     | 14   |
| 2 sul goude Nedeleg    | 14              |                     |     |     | 16   |
| Ar Rouanez             | 14              |                     |     |     | 19   |
| Badiziant or Zalver    | 15              |                     |     |     | 22   |
| Merher al Eudu         | 17              |                     |     |     | 24   |
| 1a sul ar Horaiz       | 19              | 17                  | 11  | 9   |      |
| 2 " "                  | 20              | 19                  | 13  | 11  |      |
| 3 " "                  | 21              | 21                  | 15  | 13  |      |
| 4 " "                  | 22              | 24                  | 17  | 15  |      |
| 5 " "                  | 23              | 29                  | 20  | 18  |      |
| Ar zul Bleuniou        | 25              | 33                  | 23  | 20  | 27   |
| Ar ZIZUN FASK          |                 |                     |     |     |      |
| Ar yaou Gamlud         | 30              |                     |     |     | 29   |
| Gwener ar Groaz        | 32              |                     |     |     | 32   |
| An noz Fask            | 37              | 41                  | 30  | 28  | 43   |
| Ar ZUL FASK            | 46              |                     |     |     | 59   |
| 2 sul ar Pask          | 49              | 42                  | 31  | 29  | 64   |
| 3 " "                  | 49              | 43                  | 32  | 30  |      |
| 4 " "                  | 50              | 46                  | 34  | 33  |      |
| 5 " "                  | 50              | 48                  | 36  | 35  |      |
| 6 " "                  | 51              | 50                  | 37  | 36  |      |
| Ar Yaou Bask           | 51              | 51                  | 39  | 38  | 65   |
| 7 sul ar Pask          | 53              | 52                  | 40  | 39  |      |
| AR PANTEKOST           |                 |                     |     |     |      |
| en derhent             | 53              |                     |     |     | 69   |
| d'an deiz              | 54              |                     |     |     | 75   |
| Sul an Dreinded        | 55              | 53                  | 42  | 40  |      |
| Sul ar Zakramant       | 56              | 55                  | 43  | 42  |      |
| Gouel ar Galon Zakr    | 57              | 57                  | 45  | 44  |      |

(1) Ar pedennou a vez kevetaet el Levr Overenn  
Al lennadennou a vez kavetaet el levrioù A. B. C. T.

OVERENNOU AR WERHEZ, AR ZENT HAG AR ZENTEZED

e doug ar bloaz

|                                             |                                        |                    |
|---------------------------------------------|----------------------------------------|--------------------|
| 1 janvier                                   | : Santez Mari, mamm da Zoue.....       | L.O.(1) + K 12 (2) |
| 17 janvier                                  | : I. V. PONTmain.....                  | K 47               |
| 2 février                                   | : Jezuz kaset d'an Templ .....         | L.O + K 26         |
| 11 février                                  | : Ar Werhez en em ziskouezet e Lourd   | K 34               |
| 18 février                                  | : Santez Bernadeta.....                | K 49               |
| 3 mars                                      | : Sant Gwenole.....                    | L. O               |
| 12 mars                                     | : Sant Paol a Leon.....                | L.O.               |
| 19 mars                                     | : Sant Joseph .....                    | L.O.               |
| 25 mars                                     | : Anonsiasion (gouel Maria Veurz) ...  | L.O.               |
| 19 mai                                      | : Sant Erwan .....                     | L.O. + K 20        |
| 31 mai                                      | : Gouel ar Visitasion .....            | K 34               |
| 17 juin                                     | : Sant Herve .....                     | K 49               |
| 24 juin                                     | : Sant Yann Vadezour .....             | L.O.               |
| 29 juin                                     | : Sant Pèr ha Sant Paol .....          | L.O.               |
| 16 juillet                                  | : I. V. Menez Karmel .....             | K 34               |
| 26 juillet                                  | : Santez Anna .....                    | L.O. + K 27        |
| 5 août                                      | : Dedi iliz veur ar Werhez e Rom ..... | K 34               |
| 15 août                                     | : Gouel Maria hanter eost              | L.O. + K 34        |
| 22 août                                     | : Santez Mari Rouanez .....            | K 34               |
| 8 septembre                                 | : Ginivelez ar Werhez /.....           | L.O.               |
| 14 septembre                                | : Ar Groaz savet .....                 | L.O.               |
| 15 "                                        | : Seiz Glahar ar Werhez ;.....         | K 34               |
| 1 octobre                                   | : Santez Tereza ar Mabig Jezuz .....   | K 26               |
| 7 "                                         | : Gouel ar Rozera .....                | KK 23+ 34          |
| 1 novembre                                  | : Gouel an oll Sent .....              | L.O.               |
| 2 "                                         | : Gouel an Anaon .....                 | K 36               |
| 8 décembre                                  | : Ar Werhez konsevet dinamm .....      | L.O. + K 34        |
| 12 "                                        | : Sant Korantin .....                  | L. O.              |
| d'ar zadorn euz an 3ved sizun goude         |                                        |                    |
| ar Pantekost : Gouel Kalon dinam Mari/..... |                                        | K 34               |

(1) L.O. = Levr Overenn

(2) K = Kaier, KK = Kaierou

OVERENNOU EN ENOR D'AR ZENT, dre rummad

---

I) En enor d'ar Werhez Vari :

- 1) War ar bloaz I, II, III..... K 33 p. 2
- 2) Epad an Azvent IV ..... K 33 p. 5
- 3) Epad amzer Nédéleg V ..... K 33 p. 6
- 4) Epad amzer ar Pask VI ..... K 33 p. 7
- 5) Pedennou an overennou ..... K 33 p. 9
- 6) Al lennadennou ..... K 33 p. 10.....

II.- En enor d'ar Verzerien :

- 1) er mêz euz amzer ar Pask..... K 41, p. 1-7
- 2) e amzer ar Pask ..... K 41 p. 8-12
- 3) al lennadennou ..... K 42 p. 13-18  
..... K 43 p. 29-33

III.- En enor d'ar Bastored :

- 1) ar pedennou ..... KK 43 ha 45 p.34-51
- 2) al lennadennou ..... K 43 p. 52-62
- 3) ar salmou hag an Aviel..... K 45 p. 1-10

IV.- En enor d'an Doktored :

- 1) al lennadennou..... K 45 p. 10-16
- 2) ar salmou ..... K 45 p. 17-18
- 3) an Aviel ..... K 45 p. 19-22

V.- En enor d'ar Gwerhezad :

- 1) ar pedennou ..... K 43 p. 51
- 2) an overennou ..... K 46 p. 1-4
- 3) al lennadennou ..... K 46 p. 17-24

VI.- En enor d'ar zent ha d'ar zentezed dre vraz :

K 46 p. 5-16

VII.- Overennou all :

- 1) Evid ar peoh ..... K 28, p. 97-99 ha K 49
- 2) Ar bloavez santel ..... K 31 p. 53
- 3) Evid trugarekaad Doue..... K 47 p. 1-6
- 4) Evid ar beleg e-unan ..... K 47 p. 8
- 5) Evid an Iliz ..... K 48 p. 1-5
- 6) Evid breuriez ar feiz ..... K 48 p. 6-17
- 7) Evid lod digouzou ..... K 47 p. 1-6

## A R R I T U A L (1)

---

|                                                      |                   |
|------------------------------------------------------|-------------------|
| Ar Vadiziant .....                                   | KK 4 bis, 40      |
| Ar Binijenn, - an absolvenn .....                    | KK 28-35-37-42... |
| An Absolvenn roet da veur a hini<br>war eun dro..... | KK 35-37-42       |
| Ar briedelez .....                                   | KK 29-30          |
| An nouenn .....                                      | KK 31-32          |
| Induljans ar maro mad .....                          | K 31              |
| Pedennoù dirag ar re glañv .....                     | K 32              |
| Komunion ar re glañv .....                           | K 34              |
| <u>Endro d'ar re varo :</u>                          |                   |

|                                      |          |
|--------------------------------------|----------|
| a) er gêr .....                      | K 34     |
| b) euz ar gêr d'an Iliz .....        | K 34     |
| c) en iliz .....                     | KK 35-36 |
| d) er vered .....                    | K 36     |
| e) d'an 2 a viz du .....             | K 36     |
| f) overenn deiz a bloaz .....        | K 36     |
| g) overennoù all evid an anaon ..... | KK 36-37 |
| h) pedennoù all .....                | KK 36-37 |
| i) lidoù all .....                   | K 37     |
| j) al lennadennou .....              | KK 38-39 |
| k) interamant ar vugale .....        | KK 37-39 |

Lid ar basion .;.;.;..... K 31 p. 43

Bennoz solanel ar beleg ..... K 31 p. 57

Ar pedennoù meur :

|                                  |              |
|----------------------------------|--------------|
| I, II, III, IV .....             | Levr overenn |
| evid overennoù ar vugale I ...   | K 37, p. 76  |
| II ...                           | K 40 p. 1    |
| III ....                         | K 40 p. 5    |
| evid an unvaniez : I ha II ..... | K 41 p. 37   |

---

(1) al lizerenn K a ro deom niverenn ar hañer  
ē-īēh ma vo kavet

---

## A R P R E F A S O U

---

Ar Prefasou a vez kavet el Levr Overenn evid peb sul euz ar bloaz hag ar gouelioù deiziet a hell beza lidet da zul, hag an nebeud gouelioù all a vez lidet en eskopti.

Prefasiou all ha ne vezont ket kavet el Levr Overenn :

|                            |       |                             |       |
|----------------------------|-------|-----------------------------|-------|
| War pemdez er horaiz.....  | K 3   | Ar zent .....               | K 6   |
| War pemdez e doug ar bloaz | K 3-6 | Ar zant a zavas an eskopti  | K 6   |
| An Ebestel .....           | K 6   | An anaon I, II, III, IV,V.. | K3-35 |
| Dedi eun Iliz .....        | K 6   | An unvaniez I, II           | K 41  |

KANTIKOU EMBANNET ER HAIEROU (1)

[illegible]

(1) Klask an danvez en niverenn merket euz ar Hañterou pe e L.O. (Levr Overenn)

## RAK-SKRIDOU

|                                                                          |                         |
|--------------------------------------------------------------------------|-------------------------|
| Pourquoi ces cahiers.. (P.Y. N.) .....                                   | K 1                     |
| Labour grêt, labour da ober.....                                         | K 11                    |
| Maro Per Yann Nédélec .....                                              | K 15                    |
| Du breton, Pourquoi ? (J.F.) .....                                       | K 15                    |
| D'al lennerien .....                                                     | KK 18-35-36-37          |
| Peseurt brezoneg a zo ganeom? .....                                      | K 19                    |
| Dre zil ha dre gaer .....                                                | K 22                    |
| Bennoz Doue .....                                                        | K 23                    |
| Tre ha lano .....                                                        | K 24                    |
| D'ar yaouankizou .....                                                   | K 25                    |
| Brezoneg pe get en iliz parrez .....                                     | K26                     |
| On Tad santel ar Pab<br>hag al liderez e brezoneg .....                  | K 27                    |
| An overennou lavaret en tri eskopti :<br>Gwened,sant Brieg ha Kemper ... | KK 31,32,33             |
| Enklask war al liderez e Brezoneg.....                                   | K 29                    |
| Overennou Radio .....                                                    | K 34                    |
| Divizou etre Fañch )<br>hag e berson )...                                | KK 38,39,40,41,42,43,45 |

## TRAOU ALL, MESK HA MESK

|                                                                                  |          |
|----------------------------------------------------------------------------------|----------|
| Etudes et documents (P.Y. N.) .....                                              | K 2      |
| Problème pratique du "Levr overenn<br>an dud fidel.....                          | K 2      |
| Instruction du Concilium Liturgique<br>sur la traduction des textes liturgiques  | K 2      |
| Conseils de Mr le Chanoine PENCREAC'H<br>aux candidats à la licence.....         | K 2      |
| Etudes de grammaire (V. F.) .....                                                | K 3      |
| Lid ar Basion .....                                                              | K 31     |
| Ar bloavez santel .....                                                          | K 31     |
| Piou oa an Ao. Cozanet .....                                                     | K 49     |
| Danvez da skeudenna ha prezegennoù .....                                         | K 46     |
| Peseurt kan implijoud en iliz<br>evid an interamanchou.....                      | K 48     |
| Toniou nevez.....                                                                | K 20     |
| An "Ave Maria" e brezoneg euz<br>ar 16ved kantved beteg bremañ .....             | KK 45-48 |
| Ar Bater e brezoneg<br>euz ar 16ved kantved beteg bremañ ...                     | KK 47-48 |
| Studiadenn verr (F. F.) .....                                                    | K 48     |
| Buez ar zent, e skeud ha war roudou<br>dom Mikêl an Nobletz : an Tad Quintin F.E | K48-49   |